




KENVREURIEZ AR BREZONEG

KATEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG

SEIZVET BLOAVEZ.

(40, 41, 42, 43, 44)

Taolenn an Niverenn 42:

- 1) Fanch d'an Aotrou Person. (eil lizer)
- 2) Sakramant ar Binijenn. p. 65
- 3) AR Groaz. (kendalh) P. 71
- 4) Al lennadennou evid
overennou en enor d'ar
Zent ha d'ar Zentezed; p. 79

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreurezh ar Brezoneg" (Koun. 25 lur),
her goulenn digand:

Ao. Job SEITE, Skol an Aod, 29249 GUISSENY

CCP 1738-66 Rennes.

Kavoud a reoh azaleg bremañ:

- 1°) "Levr-Overenn" gand eur golo ler drevezet 50 lur
 plastik 36 lur
 paper kalet 32 lur.
 + mizou kas.
- 2°) "Komz Doue en Overenn" Levr T 30 lur
- 3°) "Komz Doue en Overenn" Levr A, B, C ... pebhini 20 lur.
- 4°) "Ar Briedelezh" ... 8 lur
- 5°) "An Nouenn" ... 8 lur
- 6°) "Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon" ... 35 lur
- 7°) "Kroaziou Keltieg" (Bleun Brug) ... 3 lur
- 8°) Overennou evid an Anaon. ... 8 lur
- 9°) Overennou en enor d'ar Werhez" ... 8 lur
- 10°) "Sakramant ar Vadiziant" ... 8 lur

Troidigezioù aotreet da arnod evid an eskobti a-berz
an Ao. F. BARBU, eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 15 a viz eost 1976

Visant FAVE, eskob Skoazeller.

Aotrou Person,

Lavaret ho-peus: "an oll bremañ a oar galleg, koulz ha brezoneg."
ar pezh a zo sur eo ez a an oll bremañ d'ar skol, d'ar skol greet e galleg
hag ev id deski galleg; bremañe hellfed lavared: evid peurzdeski ar galleg pe da vian-
na barrekaad war ar yez.

Med n'eus ket ken pell-se c'hoaz e vezed diwezad o staga, da eiz bloaz
awechou ousspenn, hag abred o tistaga evid gelloud mond da hounid. Deuet d'ar gêr euz
ar skol, n'o-deze nemed ral a dro da gomz e galleg, hag evid ar pezh a zell ouz al
lenn, n'eo ket int-i a lakee keravuez war al levrioù pe ar hazetennou. E brezoneg
avad ez eent war araog... Me va-unan a gav tro ken alies ha bemdez pe dost da zeski
gerioù nevez pe droioù-lavar nevez.

Bremañ e chom ar vugale diwezatoù er skol, ha kalz a ya war studioù
uhelloh. Med taolom evez ! pezh euz ar re a zo ganeoh er hatekiz a jomo da labourad
er barrez ? Edoh c'hoaz o klemm n'eus ket pell; ar dri farz euz an dud yaouank ho-
peus eureujet warlene a zo eet e kêr warlerh o boued ha war lerh o labour. E peleh
emaint pe e vezint ar re o-deus bet eur CAP pe eur bachot pe eur lisañs ? A-drugare
Doue koulskoude ez eus bremañ hiniennou, desket mad, hag o-deus intentet e hell
eur paotr yaouank pe eur plah yaouank desket, kaoud war ar mhez, n'eo ket marteze
eur vuez ebad med eur vuez eñruz, evel labourer douar pe artizan pe gomersan. Hag ar
re zesket a eo ar re a ra an nebeuta a fae war ar brezoneg. Ar re a zo bet red dezo
mond e kêr, pa zeuont en hañv d'ar vro, da aveli o fenn, n'eo ket ar re-ze daoust ma
vefent barrekoh war ar galleg, n'eo ket ar re-ze eo a damallo deoh lakaad kana kanti-
kou e brezoneg, pe distaga eur ger brezoneg bennag er gador. N'ho-peus nemed goulenn
outo. Ar re-ze a vez gand ar re genta o kemer o oto evid mond da zelaou eun overenn
e brezoneg-ma vez hini pe hini- ha goude ma ve red dezo ober ugent pe dregont kilo-
metr.

Ha neuze ar re goz a zo ivez ! Ar pezh a zo ar wasa, ma kendalh ar bed
da drei evel ma ra, ne vo mui hebdale nemed tud war an oad ha bugale en ofisoù. Ar
re goz-se ne glemmint ket ouzoh, gouzañv a raint. Ar re-ze eo ar baour, hag ar re
baour a zo boazet da blega heb klemm. C'hwit, Aotrou Person, a zo deuet war an oad
ivez hag a dlefe delher kont euz ar re goz ha goude ma ne vefe nemed eur wech dre
vare. C'hoaz e lavaran; ar pezh a rebechan n'eo ket ma ve galleg en ilizou, med ma
ne ve gwech ebad a brezoneg. Eur poent a vo, sur eo, e vo eet d'ar bez ar re gosa,
med warhoaz a zo warhoaz ha bremañ a zo bremañ.

Bremañ e vez awechou overennou evid ar vugale, e galleg penn-da-benn
stêr eo, hag a zo mad. Med en devez all ho-peus bet eun overenn evid ar vreuriez
"La Vie Montante", "hag adarre e galleg penn-da-benn ! Koulskoude ! Aotrou Person !;

Va digarezit, Aotrou Person, ne garfen ket beza flemmuz...

Atao gand doujañs.....

Fanch.

Gand an alsolvenn roet da veur a hini war eun dro. (Diwar an doare m'eo bet lidet, e Lourd, e doug miz gouere 1975) (1)

I-D'an Digor:

1-Kantig "eun Doue a zeu d'ho kolver..." N° 21 Marrec (2)

2-An Digemer:...(Va breudeur) Deuet om amañ da houlenn pardon euz or pehejou, pardon digand Doue, pardon digand or breudeur, digand an Iliz....

Da genta, eur zell war or buez, war or houstiañs, hag añzav ouzom on-unan n'om ket direbech...

M arteze zoken eo sammet ponner or houstiañs, nemed ne blij ket deom chom da zoñjal e kement-se...

Hirio, eun Doue a zeu d'ho kolver...leun a vadelez, prest da bardoni, evel ma pardonas d'ar vaouez avoulterez.

Doue e-neus karantez evidom, Doue a zo karantez...Gand fiziañs eo e teuom davetañ asamblez.

3-Kantig: "Karom Doue da genta..." N° 10

4-Ar beleg: (Dioustu goude fin ar hantig)

Pedom....

Ya, Aotrou Doue, bez'ez oh on Tad, c'hwi a blij deoh rei digemer d'ar peher, c'hwi a blij deoh kared ha pardoni.

Taolit hirio ho sell war ho pugale deuet davedoh gand fiziañs,

Lavarit deom, eur wech c'hoaz, ez om pardonet.

Grit d'or spered kompren ho komzou, ha d'or halon o mired goudeze ma vo renevezet or buez.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a-oll-viskoaz da virviken. R/AMEN.

II-Lid ar Gompz:

Bremañ emaer o vond da lenn eur pennad euz Aviel Jezuz Krist. Dibabet on-eus istor ar vaouez avoulterez. Peadra on-eus aze da weled peseurt soñjou a zav e spered hag e kalon an dud dirag pehejou ar re all ha peseurt soñjou a zav e kalon Doue.

Diou lodenn eta...Setu amañ al lodenn genta...

YANN 8/2-6a...

Lenner 1: ...Kerkent ha goulou-deiz, Jezuz a zeu endro d'an Templ hag an dud a zired d'e gavoud.
Jezuz, azezet, a gelemn anezo.
Ar Skribed hag ar Farizianed a zigas dirazañ eur vaouez tapet oh ober avoultraj.
Lakaad a reont anezi e-kreiz, dirag an oll hag e lavaront da Jezuz:

(1)Eur rummad euz al lidou a zo bet embannet er haier 35(Lourd 1974)gand Aviel ar Mab Prodig.

(2)Eun nebeud kantikou a reom meneg anezo, a-hed al lidou.N'eo ket red avad heulia piz ha piz ar re a zo meneget. Peb-hini a hello dibaba ar re a gred dezañ zo ar re wella.

Lenner 2: "Mestr, setu amañ eur vaouez,
a zo bet tapet oh ober avoultriaj.
El lezenn, Moizez eneus gourhemennet deom
laza a daoliou mein eur seurt merhed-se.
Ha c'hwi, petra 'lavarit ?

Lenner 1: "Evel-se e komzent evid e baka;
dezo da gaoud tro d'e damall goudeze.

Amañ e weler komportamant an dud... Na poaniuz eo! Kriz 'int e-keñver ar
beherez.

Setu eur vaouez hag e-deus greet eur pehed braz en he heñver heh-unan
hag e-keñver e familh.

Anavezet eo he fehed gand an dud; eur pehed hag a zo barnet kalet ha
kastizet c'hwero gand lezenn Moizez.

An Doktored hag ar Farizianed a zo tud lorhuz an tamm anezo;

êz eo dezo tamall d'ar re all o fehejou. Peurvuia e vez kont evel-se.

N'eo ket ar pehejou an-unan eo a damaller, med pehejou ar re all.

Ped ha ped a re all a warnom evel-se diskorpul ha tra.

Poaniuz eo an daolenn da weled, evel gwasket om en or hreiz....

Ar vaouez paour a zo evel spontet. Ne lavar netra, ne glask ket taoler
ar beh diwarni anaoud a ra al lezenn, gouzoud a ra petra 'zo ouz he
gortoz: beza taolet mein outi beteg ar maro.

Ne lenn ar vaouez en o daoulagad trugarez ebed, med kentoh eur blija-
dur dianuleg. Nann, n'eus pardon ebed da gaoud eviti...

Ouspenn, n'eo ket outi hebken ema o malis. Klask a reont afer ivez ouz
Jezuz.

"Ne zalhim kont ebed euz da aviz; goulenn a reom ouzit da zoñj,
evid kaoud tro d'az tamall, te ivez, te hag a zo ouz on dislavared,
o kaoud abeg ennem hag en on lezennou; petra bennag a lavari: komzou
a drugarez, pe gomzou a damall te ivez a vo kondaonet ganeom!

Daoust hag an dra-mañ, va breudeur, ne zigas ket da zoñj deom ar pezh
a welom endro deom? Tamallet e vezom, ha tamall a reom didruez,
awechou marteze e gaou. Trist eo kement-se. Piou a roio deom sklerijenn,
evid or lakaad war an hent mad ?

Eur hantig. Keuz d'ar pehed. N° 40

Selaouom bremañ an eil lodenn euz istor ar vaouez avoultrerez...
(Yann 8/6b -11)

Lenner 1: Jezuz, daoubleget, a skrive war an douar;
O veza ma talhent d'ober goulennou outañ,
e sav e gein hag e lavar dezo...

Lenner 2: "An hini ahanoh a zo dibeh,
dezañ ar henta da daoler mein outi !"

Lenner 1: Hag eet adarre en e zaoubleg,
en em lak endro da skriva war an douar
Ar re all, goude beza e glevet
a denn kuit an eil goude egile,
ar re gosa da genta,
ken na jom mui nemed Jezuz,
hag ar vaouez en he zav dirazañ.
O veza savet e gein e lavar dezi:

Lenner 2: "Maouez e peleh emaint ?

Den ebed, n'e-neus ho kondaonet ?

-Den ebed, Aotrou, anezi.

-Me kenneubeud, eme Jezuz, n'ho kondaonin ket, kerzit, ha diwar vremañ ne behit mui."

Ar Rener: Gand an Aviel; setu ar sklerijenn o para. Jezuz a glask chench ar halonou kaledet-se, war eeun ez a dezo ha n'eo ket diwar dro; ha kaled e skoio !

-an hini ahanoh a zo dibeh, dezañ ar henta da daoler mein outi..."

N'edont ket e-gortoz euz kement-se sur awalh. Deuet e oant da damall ar vaouez-se. Al lezenn a oa a du ganto... Ha setu chenchet penn d'ar vaz. Testou a damall e oant, ha setu m'eo int-i eo a zo tamallet! Petra 'raint, strafuill ha nehamant a zo en o halon, gweled a reont sklêr enno o-unan, anzav a rankont n'int ket sent penn-da-benn, hag an eil warlerh egile e trohont kuit.....

-Ken na jom mui nemed Jezuz hag ar vaouez en he zav dirazañ..."

Hirio, ni ivez a glev ar homzou-se. Ped kwech n'on-eus-ni ket faziet o tamall hag o kondaoni ? N'eo ket hennez pe honnez oa deom barn, med ni on-unan, evid ar hriz m'oa or halon, evid beza ankounaheet or pehejou on-unan.

Diouz eun tu, an dud troet da gondaoni ar re all, ha diouz eun tu all madelez an Aotrou Doue. Jezuz, n'eo ket eur baherez eo a wel dirazañ, med eur vaouez, pleget dindan samm ha zempladurez, eur vaouez karet gand an Doue e-neus he hrouet. Eun Doue e-neus karet kement an dud m'eo deuet en o zouez, o kemer perz en o buez, heñvel outo, e peb keñver, nemed evid ar pezh a zell ouz ar pehed...

Eur vaouez ken karet gand Doue ma pigno heb dale eviti hag evidom-ni ar menez Kalvar.

Har ar vaouez a zant ar garantez-se o veuzi anezi, eur g arantez hag en em zil en he gwazied beteg ober anezi eur grouadurez nevez. Ar paour kêz maouez setu ma teu Jezuz daveti gand doujañs gand karantez...

-Mad, ne kenneubeut ne gondaonan ket ahanout...

Bremañ avad e vo gouest da jeñch buez...

-Hiviziken, na gouez mui er pehed.

Ya, gouest out da zevel, gouest da jeñch buez.

Fiziañs am-eus ennout."

Va breudeur, hirio an Aotrou Krist a houlenn diganeoh kared ho nesa, kared ar re all ha kaoud fiziañs enno, bremañ pa ouzoh gwelloh petra oh, hoh-unan, ha p'ho-peus kavet hent ar pardon hag hent ar joa, an eil o sikour egile.

Hirio ivez an Aotrou Krist a daol warnom ar memez sell a garantez hag a drugarez, n'eo ket euz or pehejou eo e talh kont, med euz ar heuz on-eus dezo, euz ar gouest ma'z-om, ma karom, da gaoud eur vuez santel-loh, euz ar pezh ma'zom: bugale da Zoue.

Lezom ar zell a garantez a ra an Aotrou Doue ouzom, da vond don en or halon, selaouom e vouez ouz or golver. Gouzoud a ra e hellom kemer eun hent nevez, hent ar sklerijenn, hent al levenez gwirion.

Eur hantig; Karom Doue da genta. N° 10.

III-Lid ar Binijenn:

Ar beleg: Kompren a reom gwelloc'h bremañ petra dalv sell an Aotrou Doue
o para warnom: leun eo a fiziañs, med goulenn kalz a ra.
Neuze e hellom, e gwirionez, pedi asamblez hag en brepari
da reseo ar pardon.

Lenner 1: Jezuz a lavare d'e vignoned:

Ma ouezfeñ donezon Doue,
Ma ouezfeñ peseurt karantez e-neus evidoh
Ma ouezfeñ kement e-neus greet evidoh.
Ma ouezfeñ eo Doue karantez !

Ar Rener: Setu ni dirazoh Aotrou...Re alies dizeblant, kontant ahanom
on-unan, daoust d'an dister ma'z om, c'hoant ebed deom
da vond davedoh, c'hwi hag a zo eur vammenn a zour a vuez !

Deuit, Aotrou, ha roit deom kaoud c'hoant ahanoh...

Kantig: ...An ene devot da Jezuz. N° 9.

Lenner 2: ...Jezuz a lavare d'e vignoned:

Deuit davedon, me eo ar sklerijenn, me eo an hent...
An hini a zeu d'am heul ne gerz ket en deñvalijenn...
anaoud a ra e hent...

Ar Rener:

Ha setu ni dirazoh, Aotrou,
ken dineh ganeom, ma ne glaskom ket
gouzoud zoken war-zu peleh ez eom,
nag e peleh ema ar wirionez,
nag e peleh ema an hent mad...

An Aviel ne lavar netra deom,
ha n'om ket chalet an disterra gand ar re a zo endro deom

C'hwi, hag a zo sklerijenn,
deuit, Salver Jezuz,, hag ez aim war-raog asamblez..

Kantig: Eüruz an hini... N° 11

Lenner 1: Jezuz a lavare d'e vignoned:

Eüruz an hini a glask ar peoh...
Eüruz an hini a boagn da ziazeza ar peoh el leh m'ema...
Eüruz an hini neus naon ha sehed a justis hag a beoh...

Ar Rener:

Setu ni dirazoh, Aotrou,
evel ar Farizianed hag ar Doktored,
o tamall hag o kondaoni...
o waska ar re all pa vezom ar re greñfa,
Setu ni o klask tehed diouz peb trubuill...
C'hwi hag a zo an esperañs, deuit Salver Jezuz,
grit deom sevel en or sav evid labourad ganeoh !

Kantig: Bezit laouen.... Marrec N° 164

Lenner 2: Jezuz a lavare d'e vignoned:

Sehit ho taelou, digorit ho kalon d'ar joa...
Ho kweled a rin adarre hag e vo al levenez ho lod...
Ho tristidigez a zeuio da veza joa....
ha n'hello den he dilamm diganeoh...

Ar Renner: Setu ni dirazoh, Aotrou,
aon ha tregas a zo warnom...
monda reom evel war-adreñv,
o keuzi war an amzer dremenet,
hab fiziañs en amzer da zond...
C'hwi hag a zo evidom an amzer da zond,
C'hwi hag a gerz en on raog,
o klask ma vefem eüruz
deuit, Salver Jezuz,
hag e hellim diskouez d'an dud,
petra eo eürusted bugale Doue !

Kantig: Euz ar bez beo on savet... Marrec p.157

Ar Renner: Va breudeur, bremañ, ar re o-deus c'hoant a zo o vond da
reseo an absolvenn. Eun dra vraz eo pardon Doue, gou-
lenn a ra diganeom trei kein d'ar pehed, e repari ar gaou
on-defe greet... Goude-ze, ma kred deom ez eus eur pehed
braz war or houstiañs, pe m'on-eus c'hoant kaoud skleri-
jenn war or buez, ez aim da gavoud eur beleg. (Amañ, e
Lourd, ne vo ket diêz deom.)

Ar beleg: Bremañ chomom sioul eur pennad... Ar re o-deus c'hoant
kaoud an absolvenn euz o fehejou a lavaro asamblez ganin
ar "Me anzav ouz Doue" en eur stoui o fenn:

"Me 'anzav dirag Doue oll-halloudeg,
ha dirazoh, va breudeur,
am-eus pehet braz
dre zoñj, dre gomz, dre ober ha dre jom heb ober.

Rag-se e houlenman digand ar Werhez-Vari,
an êlez hag ar oll zent,
ha diganeoh, va breudeur, pedi Doue evidon.

Doue an Tad
ha n'ema ket o klask maro ar peher
med kentoh ma tistr oio davetañ,
ha m'e-no ar vuez,
Eñ hag e-neus or haret da genta
ha kaset e Vab er bed
evid ma vo salvet ar bed drezañ,
Plijet gantañ diskouez e drugarez en ho keñver
ha rei deom e beoh.-Amen.

An Aotrou Jezuz Krist
hag a zo en em roet d'ar maro
evid daspren or pehejou
hag a zo savet a varo da veo
evid or renta santel,
Eñ hag e-neus skuillet ar Spered Santel war an Ebestel
ma resevfent ar galloud da hardoni ar pehejou,
Plijet gantañ, dre ar garg fiziet ennon
nêtaad hoh ene diouz an droug
hag ho karga euz ar Spered Santel. -Amen.

Ar Spered Santel, or skoazellour hag on divennour
hag a zo bet roet deom da zilemel ar pehejou
hag e hellom ennañ tostaad ouz an Tad
Plijet gantañ glannaad ho kalonou
hag ho sklerijenna gand e splannder
deoh da embann oberou gallouduz
an Hini e-neus ho kalvet
euz an deñvalijenn d'e sklerijenn vurzuduz. -Amen.

Ha me, en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel,
a ro deoh an absolvenn euz ho pehejou. -Amen.

Ar beleg: Va breudeur, bremañ, p'on-neus greet ar peoh gand Doue,
e rankmm ivez ober ar peoh gand or breudeur,
pardon Doue a dremen dre ar pardon a room d'an nesa...
Va breudeur, e karantez an Aotrou Krist,
roit ar peoh an eil d'egile...

Kantig; Kaer ha plijuz meurbed... Marrec p.87

DA DRUGAREKAAD AN AOTROU DOUE.

Ar beleg: Bremañ ez eom da lavared bennoz d'an Aotrou Doue evid ar
grasou on-eus resevet, ha dreist-oll da veza on distro-
bet diouz ar pehed ha roet deom frankiz bugale Doue.

Kantig; Karantez vraz an Aotrou Doue... Marrec p.93

Ar Rener: Ya, Aotrou Doue, setu ho pobl, c'hwi eo a ra ahanom tud
nevez,
ho sell madelezuz warnom a ro fiziañs deom,
ha nerz da vond adarre gand on hent,
C'hwi eo a ro deom ar frankiz.

Kantig; ...Bezit laouen.... Marrec p;96

Ar Rener: Ya, Aotrou Doue, setu ho pobl,
C'hwi eo a ra deom trehi war or zempladurez.
A-unan ganeoh ez om gouest da embann hoh aviel
hag ho karantez d'an oll.
C'hwi eo a ro deom ar frankiz.!

Kantig: ...Meulom oll ... N°12

Ar Rener: Ya, Aotrou Doue,
Setu ho pobl !
A-unan ganeoh ez om, e gwirionez, beo ar bed a hirio.
Baneoh e hellom labourad
evid ma vo emgleo ha karantez etre an dud,
C'hwi eo a ro deom ar frankiz !

Kantig: Da feiz on Tadou Koz. N°20

Galv ar Groaz.

Ar Groaz uhel war eur garreg !
Ar groaz a zank en or buhez....en
or hig beo!

Ar Hrist en noaz....draillet !
gervel a ra re all...a die o buhez,
o halon beza draillet dre garantez evitañ!
N'eo ket eun abad...beza galvet
Torr !Torr! muioc'h eged ar re all...da galon
a lamm dinarvet.
Torr !Torr! me va unan he leunio.
da galon...ouz ar groaz da galon !

o
o o

Nag ez-eo dudiuz da gorr, o va dousig !
Azezom ta e kuz. Amañ 'z'eus eun toullig!

Azez e va hichen
lak da vreh war va choug,
lak da benn ouz va fenn.
Kleo!kan ar goukoug!
An oullo a zono
ha ni a humreo.

O ! da vleo neudou seiz
tener evel ar gliz.
Me garfe, o dousig
e teufent 'hed an deiz
em choug d'ober illig.
O ! da gorr dudiuz
kizellet ken dispar,
Da gorr a zo mezuiz
Va dousig...me da gar!
'evid atao !evid atao!
va horv a vo da dra. Da hini va zra!
Doue o! liamno,
'vel ma liamm bemdez war on tro ar bleuniou,
Eun tantes birvidig a ray or halonou.
n'emeus karet nemed te
ne garin nemed te!"

Hag evel en eul lamm e stardas e gorr tomm
He hini a grene, 'vel eur paoukez evnig,
O klask eun tamm goudor. O, emezi, chom, chom
ganin, o va dousig! va luskell goustadig!

O humre
a blaowe!
Eun tug en Arvor,
eun nor
bepred digor!
Levenez!
Karantez!

An heol gand e vannou
a hoarie war muzelloù
strobinnelluz,
a houlenne pokou
pokou nerzuz,
pokou paduz!

Bemdez! Bemdez evelse
Nag eo aez da houde
al labour pemdezieg
Aez eo skigna madelez
en eul lenn a garantez!

Roz, hebken roz,
euz ar mintin dan noz!
An drein ne zankont ket
gand eur pok int tennet!

Setu war an treuziou
mouchoarz bugaligou.
FRouez ar garantez!
Ar wezenn ne ro ket a frouez
a zo tra didalvez.
Evid rei ar vuhez
evid hen hada puill, dizamant, heb enkrez
peb tra veo 'zo krouet.
On izili, enno terzienn
or halon, dinanwet a houlen,
hervel ouz ar sivi,
a daol beb tu skourrou
Nevezi! Nevezi !
Ar gourhemenn kenta: skigna buhez
euz baradoz ar garantez!

Karantez! Karantez!
O va dousig
An tan 'zo krog en on tantez.

Da galon a zev ouz va hini
lammet a ra 'vel eur bouchig,
'vel eur pintig,
ha da jodou
zo ruz-tan glaou,
Mui ne varvo
tantez
or buhez
O! va dousig !

o
o o

Perag e teu ar wenanenn
da zuna er vleunienn
ar pezh kaera
perlezenn aour
d'ober mel flour !

Ne gomprenom netra!
 Gwelloc'h eo soubla
 or penn ha lezel
 Doue gand e labour santel,
 En noaz
 Ouz ar groaz,
 e fell dezant staga re all
 e touez an dud fall
 ar re wella
 ar re gaera
 da veza deuet,
 bruzunet !

Gand ludu e krou
 ne fell dezant netra all,
 tudou
 nemed ludu du
 loustoni
 da zevel koantiri !

An Iliz 'zo sioul. En zo bet o paska.
 "Bennoz, bennoz, o mestr, emezan, d'ar Zalver.
 M'ho karo da viken. Bleuniou euz ar haera,
 ho peus hadet, Jezuz, war hent ho servicher.

-Va zervicher, mignon, a zell ouz va hroaz,
 Warni me 'jom staget, va unan, en noaz.
 Me a zach davedon; me 'zacho da viken
 ar halonou gwella, va gwir zervicherien,
 Hag an tan a zired euz kalon eur plahig
 n'eo ken, mignon, nemed eur hlaouiadennig,
 e kichen an tan gwall a diz euz va hini
 da zevi.

Ya ! beteg ar gorzenn, da ludui
 kalonou!

Fa ne vint netra mui nemed ludu, poultrenn
 ma a zavo ganto
 eun tantes nevez:

Rod ar vilin a ra gand ar gwiniz bleud gwenn
 med ar bleud-se, maro, a deu en overenn
 d'ar vuhez ganin-me! Me deu gand va hroaz
 da ambludi ar bleud. Ha va horv en noaz,
 va horv beo.

E tevio da veza ar bleud maro,
 hag anezan e flao
 e sav tanteziou all a beb tu en dremwel.
 Va horv en noaz, divarvel,
 a deu da houeza tan er bleud hag el ludu;
 Ar Spered o doug a beb tu.
 Peb greunenn
 a deu da veza eur wezenn !

Den d'o gwel, ar gwez-se
 Eo me !

Hag an elez, euz barr an neñvou !
 Er broiou tomm ez eus gwez ne roont bleuniou
 nemed beb daou pe dri vloaz.
 Va horv d'in me en noaz
 a lak gwez da zevel, med red eo kantvejou
 'raog ma welo ar bed
 o bleuniou dispaket!

O bleuniou!
 Ar bleuniou n'eus nemeto hag a ve peurbaduz.
 Bleuniou an douar-mañ: lostennachou!
 ezomm 'm'euz anezo, koulskoude, ar bleuniou,
 'vid o flastra, o moustra, o frika!
 Seulvui m'eo kaer ar bleuniou
 seulvui m'int karet ar bleuniou
 seulvui m'int stage ouz ar halonou
 ar bleuniou.
 Seulvui va hroaz pounner a raio anezo
 ludu frouezuz a nijo
 a skigno a beb tu kouez houez vad an tanteziou.

Bleunienn zisparr
 da garantez
 Te her har,
 Hi a zo da vuhez.

M'her goulenn diganez evid he bruzuna!
 Me da wel o krena,
 evel ma krenen-me beteg ar gwad
 va unan en noz, er hoad!
 M'her goulenn diganez, mignon, d'ober ludu,
 d'ober bleud gwenn
 a deui da veza va horv en overenn
 etre an daouarn-se hag a glask daouarn all
 hag a glask eur horv all.
 'vel ma klask ar pisoñ er grogenn
 'vel ma klask ar vleunienn eur vleunienn!
 Daouarn mab den 'zo ket krouet
 'vid beza liammet,
 gand daou zorn all
 Hag e galon a vrall,
 pa deu harp enni
 eur galon all
 da dridal
 d'en em unani
 ganti.
 Unaniez a garantez
 zo red da rei frouez.

Me'stago da zaou zorn ouz va re gand tachou.
 Va halon 'zo digor, fraillet gand an taoliou
 lak da hini
 harp enni.
 Torr an drav. Hen digor
 evid ma teui gor,
 gwad Doue d'en em viski
 gand da hini.

Hag e roio frouez puill
 frouez rus
 Divarvel, bruzuduz,
 diouz an druill.

Stag da garv ouz va hroaz
 en noaz !

o
 o o

O! Soazig! an hini
en-eus savet gand ludo
kement a goantiri,
da vleo, da zaoulagad du
am-eus karet kement,
zo digouezet em hent !

En am galv hag e gorr en noaz
a ispill ouz ar groaz;
e gorr goloet a vehi
ne vo ken nemetan
da veza va hini
bremen.

Gand va halon din-me
Petra raio Doue ?
Bruzunet eo
heñvel ouz eun eteo
Goude deiz Nedeleg !
Ar pezh a garo, ar pezh a garo !
Kenavo !

Hag e taolas war dal Soazig
eur pog,
an hini diweza.
Hag e kerzaz
Hi a gouezaz
war ar vein,
an drein !

Ha te 'zo eüruz !

Sellit ouz ar groaz... Ober sin ar groaz, araog mond d'en em vezvi...
gand plijadurioù ar bed.

Dizrei d'ar groaz, evid klask an absolæenn... ha mond endro
da gorrata.

Aez ! Aez !

Lod a jom dirag ar groaz da glask seizoud gwir dalvoudegez an traou!
Ar Groaz ! Hebdi... an oll draou teñvalijenn!

Gand ar Groaz kemeret, douget a-greiz kalon eo e kemerer hent al leve-
nez peurbaduz.

Ha te 'zo eüruz ?

Danvez, danvez am-eus! sellit ouz va maner!
E dourioù zav en neñv, dantelezet, seder.
Plijadurioù ar bed a zo din. Gand arhant
e prener ar horvou. Me a roull dizamant!

-Da vaner 'zo eta evel eur baradoz ?
 -Allaz!Allaz! n'eo ket! Aliez da zerr-noz,
 pa welan war va lerh eun dervez all goullo
 an trenk 'zav d'an ginou!dizaour ha divalo
 e seblant va buhez. Ha seulvui ma klaskan
 turriad trañ an douar evel eun amprevan
 eun dra bennag ennoun a nij hag a houlenn
 sevel euz ar fang louz wardu ar sklerijenn.
 Me a glask he moug, he beuzi, an dra-ze,
 Ha kaer eo din ober, hi a houlenn Doue!
 Me a garfe terri, bruzuna va eskell
 N'em-eus netra d'ober rag i a zo divarvel
 An den n'eo ket krouet evid an dour arvoez,
 Dreist ar hounoul e kerz war roudou an êlez.

°
 ° °

Merhig a Vreiz-Izel;paourkêz merhig vihan
 ken moumounet gwechall e peleh da gavan ?
 Ne hellan mui herzel gand ar fler war va zro,
 eur huez pounner spontuz, huez ar brein, ar maro.
 A beb tu me a wel korfou hanter zebret;
 Frin ebed, muzellou heb krohen, daskrignet.
 Pa gemerez eun dorn e chom en da hini
 eun tamm kig louedet a rafe aon d'eur hi.
 Da vuhez dudiuz, avel yah an Arvor,
 o dilezet he peus evid bro an dud lor,
 Hag eun deiz marteze, o hleñved da flastro,
 O merhig Breiz-Izel, deus 'ta ganin en dro!

Nann! ne sizroin ket. Staget ouz e groaz
 Va mestr oa evel do, skrignet e gorv noaz.
 Me m'eus kavet amañ, wardro tud keiz
 ar pezh ne gaven ket war aotchoù va Breiz
 An eurvad peurbaduz n'eus nemetañ gwirion,
 evel eur boked brug e sked e va halon.

Eun deiz...ne oar den peur , or Zalver a zizroio.

Hen embannet e-neus. Skrivet eo war an Aviel, leor ar gwi-
rionez!

Gand ar groaz e vezo an treh !

An dud 'zo perrfollet gand o deskadurez,
kollet o deus pell-zo hentchou striz ar farnes

"Ni a zo desket , emezo!

"Ni a zo tud gouest , emezo!

N'on eus ket ezomm mui euz a goz kreansou;

Ne gredom nag e Doue, nag e diaoulou.

Ni a gred ennom on unan,

An traou-koz en tan!

Dañsom!

Evom!

Rodellom!

Ar bed 'zo deom!

Savom on tour uhel.

Heñvel ouz tour Babel

Med hemañ, den n'e freuzo,

e dir e vo,

Biken ne gouezo.

Ni a red en oabl, e touez ar stered.

Baradoz ebed

n'on eus gwelet.

Ni 'zo tud ijinuz

ni zavo unan, marzuz.

N'on eus ket ezomm a skoazell,

Dizale ni vo divarvel!

Ar Groaz!

stag outi en noaz

eun Doue

Istoriou d'ar vugale!

Dañsom!

Evom!

Rodellom!

Ar bed a zo deom !

o
o o

Kreizteiz oa. Kirri-nij a zave, a hronte
en oabl digoumoul hag an dud a zebre
e tiez alaouret. Muzikou fistilluz
riboul ha diriboul a dregerne mezuuz.

"Bremaig ni yelo er hoajou da hoari,
Ni yelo el lenn emberr d'en em walhi,

Ni zastummo bleuniou,
plijaduriou
a verniou!

o
o o

Eur strakadenn spontuz
skrijuz!

An oll a gren,
teñvalijenn.

Petra 'zo, petra?

Ne weler mui netra,
Nemed kommoul du a zired d'an daoulammou
a holo an touriou
an tiez, ar pennou.

Hanter-noz da greizteiz!
er ruiou, tud eleiz

a red, a stog ouz ar mogeriou
hag o youhadennou

a sklaz ar re all. Petra 'zo ? Petra ?

Ha kurun adarre! an douar o krena ,

oh orjella

o vralla !

hag o koeza

an tiez, an touriou

hag an dud a verniou

o daoulagad dispourbellet

o izili seizet !

Setu a fardigleo o regi ar pallenn

pallenn du ar goabrenn,

hag oh en em leda, hirr beteg an dremmwall,

divreh lugernuz euz groaz arhantel.

Skedi 'ra ! skedi 'ra!

beteg dalla

lod.lod all

a zav divrall.

Ar groaz, emezo, dalhet on-eus dezi

setu hi

o lugerni.

Med kroaz, kroaz,

Te a zo noaz.

e peleh ema on Doue treh d'ar maro ?

Setu en o tond endro!
a youh eur vouez skiltr gouest da vouzara
an dud beteg ar br o'ou pella.

Setu en o tond endro
da varn ar re veo, ar re varo!

Hag e oa gwelet: n'ea ket mui en noaz
staget ouz ar groaz!

Perlezennou
a beb liou
war e zillad aour a lintre
tan a lamme
euz e gorr. E zellou a baras
a dreuzas
krogenn
peb den!

Ya! zoken hini ar re ne zellent ket
strafuillet
a oa treuzet
en eun taol lagad
beteg ar strad.

"Ha bremañ 'me ar vouez: kroaz diskenn
'uz d'o fenn!

Lod a lammas daveti
gand dudi.

Ar groaz o doa karz
Ar groaz o doa heuliet !

I a zavas ganti, en oabl da skedi
hag ar re all
ar re fall,

ar re ne gredent ket er garantez
ar re a hourveze 'vel moh war o danvez
a glaskas turriad
evid en em guzad.

Med warno goustad, pounner
e tiskenne kroaz ar Barner,
hag he zan
a lakeas an tan
en o horvou
en o eneou.

Gwelloh o diche kavet
beza dioustu
devet, lakaet e ludu.

Nann! leski! leski gand tan ar groaz
noaz!

Leski da viken e forn ar hovel
leski da viken gand da wrez divarvel

Kroaz
Noaz!

o
o o

Mab an Dig.

OVERENNOU EVID AR ZENT HAG AR ZENTEZED.

LENNADENNOU D'AN OVERENNOU EN ENOR D'AR VERZERIEN.

Ma ne vez greet nemed eul lennadenn a-raog an Aviel, e heller kemer hini pe hini euz ar re a zo kinniget amañ evel kenta pe eil lennadenn.

A-Er mez euz an AMZER FASK:

O chom fidel d'o feiz beteg penn, beteg gouzañv poaniou kriz, hag ar maro zoken, kentoh eged terri lezenn Doue, o-deus ar verzerien Yuzeo kavet an esperañs da zevel endro euz a varo da veo.

I-LENNADENN EUZ EIL LEVR AR VAKABEED 7/1,20-33,27-29

1-En deiziou-se e tigouezas gand seiz breuz hag o mamm beza paket ar roue Antioqus, a daoliou fouet hag a daoliou skourjez, a glaskas o lakaad da zibri kig-moh, ar pezh a oa divennet gand al lezenn.

20-Na kaer dreist e oa ar vamm, ha din-da veza brudet, hi hag a welas he seiz mab o mervel er memez devez, hag a houzañvas kement-se kaloneg, gand esperañs en Aotrou.

21-Kennerza a reas peb hini anezo e yez o zadou, poulzet gand memnoziou uhel he spered. Kalonek evel eur gwaz, e lavare dezo:

22-N'ouzon ket penaoz ez oh diwanet em hreiz, n'eo ket me eo am-eus roet deoh ar spered hag ar vuez, n'eo ket me eo am-eus renket kement a zo ahanoh.

23-Krouer ar bed eo e-neus furmet gouenn mab-den hag a zeu peb tra anezañ. Eñ eo a rento deoh, en e vadelez, ar spered hag ar vuez, peogwir bremañ e teuit d'en em zisprijoud hoh-unan dre zoujañs d'e lezennou.

27b-D'ar yaouanka e lavaras:
"Va mab, bezit truez ouzin-me hag am-eus ho touget epad nao miz, maget epad tri bloaz ho savet beteg an oad a vremañ, ha pourveet d'ho oll ezommou.

28-Me ho ped va mab, troit ho taoulagad warzu an neñv hag an douar, ha sellit ouz kement a zo enno, deoh da houzañvas e-neus Doue greet kement-se diwar netra, ha gouenn an dud er memez doare.

29-N'ho pet ket aon rag ar boureo-se med bezit din euz ho preudeur, roit hoh asant d'ar maro; evelse e kavin ahanoh endro, gand ho preudeur, da vare an drugarez.

DISKAN: Etre ho taouarn e lakan va spered
Va dasprenet ho-peus, o Doue feal !

3-Bezit evidon eur roh da rei dinnrepu,
eur hastell ma vin ennañ e savete!
C'hwi 'zo va nerz ha va repu!
Ablamour d'hoh ano, va heñchit ha va harpit!

6-Etre ho taouarn e lakan va spered,
va dasprenet ho-peus, o Doue feal,

7-tridal a rin gand ar joa en ho trugarez
rag gwelet ho-peus ar reuzeudig ma'z on.

16-Etre ho taouarn ema va flanedenn;
va dilivrit euz va enebourien hag euz ar re am gwask.

17-Taolit war ho servicher eur zell a garantez.
Deuit d'am zavetei dre ho kras !

II-LEVR AR FURNEZ:

Goude trubuillou ar bed-mañ, an dud just a vo digollet kaer gand
Doue. Na vezit ket enkrezet !

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ 3/1-9

1-Etre daouarn Doue ema buez an dud just
gwaskerez ebed n'he-deus krog warno.

2-Evid an dud diboell e seblantont beza marvet;
o maro d'e zoñj a zo bet eur gwaleur.

3-P'o-deus kuiteet ahanom e kredet e oant eet da netra,
ha padal emaint e peoh!

4-Hervez kredenn an dud e oant bet kastizet,
med dre o esperañs e oant dija divarvel.

5-Dister a dra eo ar pez o-deus bet da houzañv,
e skoaz an eürusted heb par a vo o lod.
Rag Doue e-neus o amprouet hag o havet din anezañ.

6-Evel an aour,paseet dre an tan, e-neus o amprouet,
evel eur zakrifiz parfed, e-neus o digemeret.

7-D'an deiz ma teuo da dremen, e skedint,
evel elvennou-tan o redeg dre ar zoul

8-Haz e vezint barnerien war ar broadou,
ha mistri war ar poblou,
hag an Aotrou a remo warno da viken.

9-Ar re a laka o fiziañs en Aotrou,
a intento ar wirionez;
ar re a zo fidel a jomo gantañ en e garantez,
rag d'ar re zibabet gantañ e ro gras ha trugarez.

SALM 125 / 1-2ab, 2cd-3, 4-5, 6,)15

Antivonenn: Mond ha dond a reont en eur ouela
Dond a reont endro en eur dridal.

1-P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,
e oa evidom evel eun hunvre.

2ab-C*hoarz laouen ganeom leiz or genou, ha kanaouennou war or
muzellou.

2cd-Neuze e lavare tud ar broiou payan:

"Ken kaer traou e-neus grêt an Aotrou evito!"

3-Ya, ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,
hag edom e barr al levenez.

4-Digasit d'ar gêr, Aotrou, on tud prizoniet,
evel froudou dour en dezerd.

5-Ar re a hade en eur skuill daelou, a ray an eost en eur gana.

6-Mond ha dond a reont en eur ouela, pa daolent an had en douar;
dond a reont en-dro en eur dridal laouen.
pa zougont o drammoù-ed-a-vriadou.

II-DANEVELLOU/.... Ar beleg Zakariaz, lazeta dirag ti Doue;

Lennadenn euz eil levr an Danevellou 24/18-22

18-En amzer-se, ar Yudeaned a zilez ti an Aotrou, Doue o zadou,
evid enori ar peulioù-zakr ha skeudennou an doueed.
en abeg da-ze e kouez kounnar Doue
war Juda ha war Jeruzalem.

19-Kas a ra Doue dezo profeted,
evid o lakaad da zistrei daved an Aotrou, dre o frezegennou.
Med, ouz o gourdrouzoù, skouarn vouzar a reont.

20-Neuze e teu Spered Doue da Zakariaz
mab ar beleg Yehoyada.

Zakariaz a zav dirag ar bobl:

"Setu amañ, emezañ, petra' lavar Doue:
perag e torrit-hwi gourhemennou an Aotrou ?
Ne zeuio vad ebed deoh diwar an dra-ze.
En abeg m'ho-peus dilezet an Aotrou,
eñ ivez ho tilezo."

21-En em gleved a reont a eneb dezañ, ha taoler mein outañ,
war urz ar roue, e porz ti an Aotrou.

22-Ar roue Joaz, dizoñjet gantañ,
pegen mad oa bet en e gêñver Yehodaya tad Zakariaz,
a laz dezañ e vab.

Hemañ en eur vervel a lavar;
"An Aotrou a welo hag a houlenno kont".

SALM 30 (da gemeret goude al lennadenn genta p.14)II-MAKABEED Merzerenti Eleazar;Lennadenn euz eil levr ar Vakabeed 6/18,21,24-31

18-Eleazar a oa unan euz doktored kenta al lezenn,
eun doare kaer a zen, deuet dija war an oad.
Digoret e vez dezañ dre forz e henou,
ha grêt dezañ dibri kig-moh en desped dezañ.

21-Ar re o oa karget euz ar pred relijiel-se,
divennet gand al lezenn,
a gemeras Eleazar en e bart e-unan,
o veza ma'h anavezen anezañ a-bell a oa,
hag hen alias da zigas gañtañ kig aotreet
keginet ganhañ,
dezañ da ober an neuz da zibri kig gourhemennet gand ar Roue.

24-Med eñ a lavaras:
"D'an oad ma'z on, n'eo ket deread ober an neuz;
a-hent-all, kalz yaouankizou a gredo dezo
eo eet Eleazat, d'e zeg vloaz ha pevar ugent,
da veva e doare en diavêzidi."

25-Hag e teufent inti ivez da gemer an hent fall,
ablamour d'an disleal m'on bet.
ha ne hounesfen ganti nemed eur pennadig dister a vuez.
Ne rafen, em hozni, nemed beza saotret ha dizenoret.

26-Ha goude ma teufen d'en em denna bremañ euz kastiz an dud,
n'en em dennfen ket, na beo na maro,
a-dre daouarn an oll-halloudeg.

27-O kuitaad bremañ ar vuez gand nerz-kalon
e vezin din euz va hozni,

28-Lezet ganin d'ar yaouankizou skouer vad eur maro kaer
roet a galon vad evid al lezenn zakr ha santel."

29-Goude ar homzou-se ez eas war eeun da veza bourreviet.

30-Ar re a oa ouz e ren, madeleuz evitañ beteg neuze,
a droas outañ o hounnar,
rag ma oa e gomzou, d'o zonz, netra nemed follentez.
med eñ, war-nez mervel dindan an taoliou,
a lavaras en eur huanadi:

"An Aotrou a zo sklêr dezañ, eñ hag e-neus ar skiant santel,
e houzañvan, pa hellen tehed diouz ar maro,
poaniou kriz em horv dindan an taoliou fouet,
med e houzañvan anezo em ene gand joa
ablamour d'an doujañs am-eus evitañ."

31-Setu aze penaoz e varvas an den-se,
o lezel dre e varo, n'eo ket hebken d'ar yaouankizou
med d'an darn vrasa euz e genvroiz,
eur skouer disheñvel a vertuz hag a nerz-kalon.

SALM 33/ 2-3, 4-5, 6-7, 8-9:

Antivonenn: Va dizamma 'ra Doue
euz peb enkrez.

2-Me'lavaro bennoz da Zoue e peb amzer;
e veuleudi bepred war va muzellou.

3-En Aotrou Doue e lakan va enor (pe: va foug)
ouz va hleved, ra vo laouen an dud fidel.

4-Rentit gloar d'an Aotrou Doue ganin; oll a-unan, meulom e ano.

5-Rag, pa zavan va mouez warzu Doue, e vezan selaouet gantañ;
va dizamma 'ra euz peb enkrez.

6-Pa droer ar zellou warzu ennañ, e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar vez.

7-Ha kriet e-neus eur paour a-greiz e drubuill
Doue a glev hag hen dizamm euz e anken.

8-El Doue 'vez dalmad war-dro an dud fidel, prest atao d'o dili-
vra.

9-Grit eun tañva, ha komprenit pegen mad eo an Aotrou Doue;
Hiruz an den a lak e fiziañs ennañ.

SALM 123/ 2-3, 4-5, 7b-8

Antivonenn: Or zikour a zo en Ano an Aotrou
e-neus greet an neñv hag an douar.

2-Paneved an Aotrou, hag a oa ganzom
pa zavas eneb deom an dud-se,

3-Neuze, gand o hounnar ruz a-eneb deom
o-defe on lonket ez-veo!

4-Neuze o-defe an doureier or beuzet,
eur froud e-nefe or goloet !

5-Doureier diroll
o-defe goloet on ene!

7b-Evel eul lapous ez om tehet
euz roued ar jacheourien;
roget eo bet ar roued
hag ez om flipet kuit.

8-Or zikour a zo en ano an Aotrou,
e-neus greet an neñv hag a n douar !

SIRAH 51/ 1-12

A beb seurt trubuillou a gavim war on hent, n'eo ket war zikour an dud eo deom konta, med war zikour Doue !

Lennadenn euz levr Mab Sirah ...51/1-12:

1-Trugarez deoh, Aotrou Doue!

Meuleudi deoh, Doue va Zalver!

Meuleudi d'hoh ano!

2-Rag bet oh evidon gwarez ha sikour;
savetret ho-peus va horv euz ar maro,
eus lasou an teodou fall,
euz ar muzellou a vez gevier ganto.

3-A eneb va enebourien ho-peus va skoazellet ha va dilivret,
hervez ar braz m'eo trugarez hag hoh ano;
ya,, euz ar re a grigne o dent, prest d'am lonka,
euz dorn ar re a glaska va laza,
euz kement a drubuillou am-eus gouzañvet;

4-Euz an tan mouguz am gronne,
euz kreiz an tan n'am-boa ket elumet,

5-Euz islong don bro ar re varo,
euz an teod louz hag ar gomz gaouad

6-Euz birou an teod disleal.
Va ene a oa war-nez mervel
ha va buez a oa war-nez koueza e bro ar re-varo.

7-A beb tu ez edont endro din ha den d'am zikour
Konta 'reen war skoazell an dud,
med ne oa netra.

8-Neuze ez eus deuet soñj din euz ho trugarez, Aotrou,
hag ez euz ho madelez a-viskoaz,
ha penaoz e teuit da zilivra ar re a lak o fiziañs ennoh,
ha da denna anezo euz a dre daouarn an dud fallagr.

9-Lakeet am-eus va fedenn da zevel euz an douar,
ha goulennet beza miret ouz ar maro,

10-Galvet am-eus an Aotrou, tad va Aotrou,
"N'am dilezit ket, da vare an enkrez,
da vare an dud a lorch; heb sikour emañ."

11-Dibaouez e veulin hoh ano,
kana 'rin kanennou a vennoz"
Hag e oe selaouet va fedenn.

12-Va zaveteet ho-peus p'edon en argoll,
ha va diframmet euz an amzer reuzeudig-se,
setu perag e fell din renta deoh bennoz ha trugarez,
ha benniga ano an Aotrou.

II-MAKABEED 7/ 1-2, 9-14

Lennadenn euz eil levr ar Makabeed. (7 /1-2, 9-14)

- 1-En deiziou-se, e t'gouezas da zeiz breuz ha d'o mamm beza paket.
Ar roue Antiokuz, a daoliou fouet hag a daoliou skourjez
a glaskas o lakaad da zibri kig-moh, ar pez a oa divennet gand
al lezenn.
- 2-Unan anezo a zisklerias, en an o an oll:
-Petra 'houlennez ha petra glaskez gouzoud diganeom?
Prest on da vervel kentoh eged terri lezenn on Tadou."
- 9-An eiñ, p'edo warnez mervel, a lavaras:
-"Te, den fallakr a zo ahanout, te a lamm diganeom buez er bed-
mañ;
med, Roue ar bed on dazorho, evid chom fidel d'e lezennou."
- 10-Goudeze e oe boureviet an trede.
Hemañ, kerkent ha ma oe greet goulennou outañ,
a dennas e deod hag a astennas e zaouarn heb aon.
- 11-Diskleria a reas kaloneg:
-An izili-mañ am-eus bet euz an neñv;
med, ablamour da lezenn Doue, e ran bremañ fae warno.
Digand Doue eo am-eus fiziañs d'o adkavoud en dro."
- 12-Ar Roue e-unan hag ar re a oa gantañ a oe estlammet
dirag nerz-kalon ar paotr-yaouank-se,
a lakee e renk netra e boaniou kaled.
- 13-Hemañ maro, e oe boureviet ar pevare er memez doare.
- 14-Dare da vervel, e lavaras:
-Kaer eo mervel dre zaouarn an dud,
pa vez esperañs, aberz Doue, da veza dazorhet gantañ,
med te, ne vo evidout adsao ebed d'ar vuez."

B-E-PAD AN AMZER FASK:I-OBEROU AN EBESTEL 7/55-60

Merzerenti Sant Stevan.

Klevom Sant Stevan, ar merzer kenta. Ar merzer a zo eun test, hag a
zeug testeni d'ar wirionez beteg rei e vuez.
Stevan a zo amañ o vond da echui e desteni.

Lennadenn euz Levrl Oberou An Ebestel (7/55-60)

- 55-En deiziou-se, setu Stevan dirag ar Yuzevien a glask e gondaoni.
Ar Spered Santel o leunia e galon, e zellou troet warzu an neñv,
e welas gloar Doue ha Jezuz en e zav en tu deou da Zoue;

56-Hag e lavaras:" Setu e welan an neñvou digor
ha Mab an den en e zav en tu deou da Zoue."

57- Ar Yuzevien en em lak da youhal a bouez penn;
en eur stouva o diskouarn,
hag oll asamblez e saillont warnañ.

58-E vounta a reont er-mêz eus kêr, ha staga stlepel mein
warnañ,
An testou a daol o maltilli e-harz treid eur paotr yaouank
anvet Saoul.

59-Hag int krog d'e laza, a daoliou mein;
Stevan, e keid-se, a oa o pedi hag a lavare:
"Aotrou Jezuz, digemerit va ene."

60-Goudeze, eet war e zaoulin, e krias a vouez kreñv:
"Aotrou, na zalhit ket outo ar pehed-mañ."
Ha war-lerh ar homzou-se, e kouezas e kousk ar maro.

SALM 30....(Gweled, goude al lennadenn genta er mez euz an amzer
Fask., p.14)

II-..AN DISKULIADUR 7/9-17

Gwalhet o-deus o dillad e gwad an oan,

Lennadenn euz levr an Diskuliadur 7/9-17

9-Me, Yann, am eus gwelet eur mor a dud
an'helle den konta ped e oant,
euz kement bro, kement rumm, kement pobl ha kement yez a zo,
oll en o zav dirag tron Doue ha dirag an Oan,
dillad gwenn ganto, ha skourrou palmez en o daouarn.

10-Hag e savent uhel o mouez, da lavared:
"Ar zilvidigez a zo d'on Doue, azezet war an tron, ha d'an Oan
ivez!"

11-Hag an oll Elez a oa en o zav, tro-dro d'an tron,
en-dro d'ar re goz ha d'ar pevar aneval beo;
eet int da stoui dirag an tron, o fenn d'an douar,
evid adori Doue, en eur lavared:

12-"Amen! Bennoz ha gloar, furnez ha trugarez, enor, galloud ha nerz
d'on Doue da virviken. Amen!"

13-Unan euz ar gozidi, neuze, a lavar din:
"Ar re-ze, dillad gwenn ganto,
piou int, hag a beleh int deuet?"

14-Ha me a respont:"Va Aotrou, c'hwi eo a oar."
Setu e lavar din en taol-mañ;
"Ar re-ze en ar re 'zo o tond euz an drubuill vraz
gwalhet o-deus o dillad, ha gwenñet anezo gand gwad an Oan."

15-Setu perag emaint dirag tron Doue,
 ouz e servicha deiz ha noz en e zantual,
 hag an hini 'zo azezet war an tron a raio e zemeurañs ganto

H'o devo mui naon na sehed
 ne vint mui skoet gand an heol na tommder ruz ebed;

17-Rag an Oan, an hini 'zo e-kreiz an tron, a vo o fastor,
 evid o ren daved feunteuniou dour ar vuhez,
 ha Doue a zeho an oll daelou euz o daoulagad."

SALM 123 ... (Gweled goude al lennadenn euz Mab Sirah p. 18)

III-AN DISKULIADUR 12/10-12

Treh int bet dre wad an Oan.

lennadenn euz levr an Diskuliadur 12/10-12

10-Hag e klevio, euz an neñv, eur vouez kreñv hag a lavare:

"Setu mare ar zilvidigez,

ar halloud ha beli an Doue,

ha galloud e Grist.

Rag stlapet eo bet d'an traon tamaller or breudeur,

an hini o zamal dirag Doue deiz ha noz.

II-Med, inti ivez, o deus trehet warnañ dre wad an Oan,

ha dre ar gomz, o-deus rentet testeni dezi.

O harantez evid ar vuez, n'eo ket eet

beteg ober dezo kaoud aon rag ar maro.

12-Setu perag bezit leun a levenez, c'hwi neñvou,

c'hwi hag o-peus eno ho temeurañs.

SALM 33 (Gweled goude al lennadenn euz levr ar Vakabed 6/18 ..P.17)

IV-AN DISKULIADUR: 21/5-7

Ar Hrist, ar penn kenta hag ar penn diweza.

Lennadenn euz levr an Diskuliadur 21/5-7

5-An hini a oa azezet war an tron a lavaras:

"setu emaom oh ober nevez peb tra,

6b-Me a zo ahanon an Alfa hag an Omega,

ar penn kenta hag ar penn diweza,

D'an neb e-neus sehed, me a roio, evid netra,

euz mammenn ar vuez.

7-An hini a vo treh e-no kement-se da lod;

hag e vezin evitañ eun Doue

hag eñ a vo evidon eur mab.

SALM 125 ... (Gweled goude al lennadenn euz levr ar Furnez...p.15)

Eil lennadenn.

I-ROM 5/1-5:

E peoh emaom gand Doue dre an Aotrou Krist , er garantez a zo bet skuillet gand ar Spered Santel.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned 5/1-5

1-Wa breudeur,Doue e-neus greet tud just ahanom dre ar feiz;
e peoh emaom eta gand Doue dre or Zalver Jezuz Krist.

2-e-neus roet deom kaoud perz, dre ar feiz,
er hras m'emaom stard enni,
hag on lorh deom eo an esperañs on-eus
da gaoud lod e gloar Doue.

3-Ouspenn a zo! en on trubuillou zoken,
e lakom on lorh,
o veza ma ouzom e sav pasianted diwar on trubuillou,

4-h a diwar ar basianted, vertuz amprouet,
diwar vertuz amprouet, esperañs,

5-Hag an esperañs ne zeu ket a gerse d'he heul,
peogwir eo bet skuillet karantez Doue en or halon
gand ar Spered Santel a zo bet roet deom.

II-ROM 8/31-39

Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist ?

Ar hlêved hag ar boan a zeu d'on dispartia diouz kalz euz or
herent peor mignoned.Med sikouret gand Doue, e hellom trehi
war gement a zeu da glask on distaga diouz an Actrou Krist.

Selaouom petra lavar Sant Paol d'ar Romaned.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Romaned 8/31-35 37-39

31-Va breudeur ker, m'ema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom ?

32-N'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan,
roet e-neus anezañ evidom oll:
penaoz gand e Vab, ne rofe ket deom peb tra ?

33-Piou a zavo tamallou a-eneb an dud dibabet gand Doue,
paz'eo Doue an hini a laka dibehed ?

34-Piou a gondaono, pa'z eo Jezuz Krist an hini 'zo marvet,
gwelloc'h c'hoaz, a zo savet da veo, a zo en tu deou da Zoue
hag a bed anezañ evidom ?

35-Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist ?
ar waskerez, an anken, an heskinerez, an naon,
an dienez, ar riskl, ar hleze ?

37-Nann! E kement-se ema an treh ganeom,
dre zikour an Hini e-neus or haret.

38-Ya, sur om a gement-se !
Nag ar maro, nag ar vuez,
nag an Elez, nag an oll grouadurien kuzet,
nag an amzer a vremañ, nag an amzer da zond,
nag ar stered, nag an neñvou,
nag an oll donderiou, na tra grouet all ebed,
netre n'hello on distaga diouz karantez an Aotrou Doue,
a zo e Jezuz Krist, on Aotrou.

III-2 Cor 4/6-15

Taolet om bet d'ar maro ablamour da Jezuz.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da gristenien Korint 4/6-15:

6-Va breudeur, an Doue e-neus lavaret:
ra darzo ar sklerijenn euz an deñvalijenn,
da lakaad da splanna an anaouedegez euz e hloar
a sked war dremm ar Hrist.

7-Med, an teñzor-se a zougom ennom evel e listri-priaj
eveise e weler sklêr, n'eo ket ahanom,
e teu ar galloud burzuduz-se,
med euz a Zoue.

8-A beb tu ez om gwasket, med pas flastret,
nehet gand on hent, med pas nehet gand en or halon.

9-heskinet, med pas dilezet,
diskaret, med pas kaset da netra;

10-Dalhmad e tougom en or horv maro Jezuz,
evid ma vo buez Jezuz, hi ivez,
roet da anaoud en or horv.

11-Rag, ni ar re veo, a vez dalhmad taolet d'ar maro,
abl原因 da Jezuz,
evid ma vo buez Jezuz, hi ivez,
roet da anaoud en or horv tonket d'ar maro.

12-Evelse em a ar maro o labourad ennom
med ennoh ema ar vuez.

13-Va breudeur, spered ar feiz on eus, hervez m'eo merket er skritur:

"Kredet am eus, rag-se am eus komzet."
Ni ivez on eus^{ar} feiz, rag-se e komzom.

14-Rag, her gouzoud a reom hervad,
an hini e-neus adsavet an Aotrou Jezuz da veo
an adsavo, ni ivez, a-unan gand Jezuz hag on lakaio ganeoh en
e gichen,

15-Kement a reom a zo ablamour deoh,
evid ma teuo grasou puill, da greski bepred, evid gloar Doue,
an anaoudegez vad e kalonou eun niver brasoh a dud.

IV- 2 Cor, 6/4-10

En em ziskouezom e peb tra evel servicherien da Zoue.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da gristenien Korint 6/4-10

4- Va breudeur, en em ziskouezom e peb tra
evel servicherien da Zoue,
troet stard da zerhel mad
en trubuilhou, er pezh a zigouez dre red, en ankeniou.

5-Dindan an taoliou, er prizonioun, e-kreiz an taoliou-freuz
er barradou skuizder, en diouer agousked, er yunou.

6-Dre ar burentez, ar ouiziegez,
ar perz da houzañv, ar vadelez,
dre ar Spered Santel, ar garantez gwirion;

7-Ar wirionez er homzou,
dre nerz Doue, dre an armou a justis da skei ha da enebi;

8-E kreiz an enoriou pe an disprij,
ar brud vad pe ar brud fall,
kemeret evel touellerien ha koulskoude gwirion

9-Evel tud dianav ha koulskoude anavezet mad
evel tud dare da vervel ha koulskoude beo buezeg
evel tud kastizet heb beza koulskoude laket d'ar maro.

10-Evel tud trist ha koulskoude bepred laouen,
evel peorien ha ni oh ober da veur a hini sevel da binvidig
evel tud dibourvez ha koulskoude peb tra en or herz.

V- 2 Tim. 2/8-15 , 3/10-12.

Euz e brizon e Rom, e lavar Sant Paol d'e vignon Timoté, n'heller ket dougen testeni da Jezuz heb gouzañv gwaskerez a beb seurt.

Lennadenn euz eil lizer Sant Paol da Dimoté (II Tim, 2/8-13, 3/10-12)

8-Dalh soñj euz Jezuz-Krist savet da veo a douez ar re varo, ganet diwar lignez David, Kement-se eo va Aviel din-me.

9-Evid an Aviel e houzañvan poan; beteg beza chadennet evel eun torfedour; med, komz Doue ne vez ket chadennet.

10-Setu perag e houzañvan peb tra evid an dud dibabet gand Doue evid m'o-deffe, int-i ivez, da lod, ar zilvidigez, ha da heul ar hloar peurbaduz.

11-Difazi eo ar gomz-se:
Ma'z ommarvet gantañ, gantañ ivez ni a vevo.

12-Ma houzañvom poan, gantañ ni a reno, ma nahom anezañ, eñ ivez on naho.

13-Ma ne jomom ket fidel,
eñ a jomo fidel,
rag n'hell ket trei kein dezañ e-unan.

3/10-Te avad a zo deuet d'am heul en va helennadurez va doare beva, va mennadou, va feiz, va fasanted, va harantez, va nerz-kalon,

11-Er gwaskerez hag er poaniou am-eus gouzañvet e Antioch, e Ikonion, e Lystr
Nag anzoare heskinerez am-eus gouzañvet !
Med anezo oll on bet delivret gand an Aotrou.

12-Ya, kement hini a fell dezañ ren eur vuez kristen, unanet gand Jezuz Krist a vezo gwall-gaset;

VI-HEBR. 10/32-36

O tigas da zoñj d'ar-gristenien euz-ar poaniou o-deus bet dija da houzañv, Sant Paol a lavar dezo kaoud fiziañs: hebdale e teuy an hini a dle dond.

Lennadenn euz al lizer d'an Hebreed:

32-Va breudeur, dalhit-sonj euz an-amzer genta m'ho-peus, goude beza resevet ar sklerijenn bet da stourm kaled ha da houzañv kriz.

33-Euz eun tu, taolet hoh-unan a-well d'an dud, d'an dismegañs ha d'an drubuill;
euz eun tu all a-unan a galon
gand ar re oll a veze gwall-gaset.

34-Kemeret ho-peus perz e poaniou ar brizonidi, asantet ho-peus, laouen braz, beza-laeret euz ho madou, c'hwi hag a ouie e oa en ho kerz madou paduz ha gwelloc'h.

35-Na gollit ket eta fiziañs; Bez 'ez ho-po eur gaera zigoll.

36-Delher mad eo red deoh,
evid ober bolontez Doue hag obten evelse
ma teufe da vad e bromesa.

VII- JAKEZ 1/2-5,12:

Kerzom war roudou or Zalver, dre ar boan.

Lennadenn euz Lizer Sant Jakez;

2-Digemerit a galon vad, va breudeur,
an oll drubuillou a gouez warnoh,

3-O houzañv e sav ar basianted diwar an amprouet m'eo bet ho feiz;

4-Med ar basianted a raio deoh beva en eun doare parfed, Evelse e vezoh parfed heb diouer ebed ennoh.

5-Ma'z eus hini pe hini ha n'e-neus ket a furnez d'ezañ, goulenn digand Doue,
en hag a ro d'an oll gand largentez
heb ober tamall ebed
hag e vezo roet dezañ.

6-Dezañ goulenn avad gand feiz, heb kaoud douetañs ebed rag an hini a jom en arvar a zo heñvel ouz ar houl er mor, a vez ejet ha diejet gand an avel.

12-Füruz an den a zalh mad e kreiz ar stourmad rag goude beza bet klasket e resevo ar gurunenn a vuez prometet d'ar re a gar DOUE.

VIII- I PER 3/15-18

Deom-ni da gompren talvoudegez poaniou ha maro ar Hrist.

Lennadenn euz lizer kenta an Abostol Sant Per: (3/15-18-)

15-Va breudeur, lañit doujañs santel evid an Aotrou Krist, en ho kalonou.

16-Bezit prest atao da renta kont euz an esperañs a zo en ho kreiz da gement hini her goulenn diganeoh;
gand douster avad, gand respêt ha gand eur galon divlamm
evid ma vo, end-eeün war ar pezh a rebecher deoh,
goloet a vez ar re a gav abeg er vuez vad a renit an Aotrou Krist

17-Rag gwelloc'h e-ve, ma vefe bolontez Doue, gouzañv en eur ober
ar mad
egedien eur oberan drowg.

18-Ar Hrist a zo maro eur e wech evid mad, evid or pehejou,
eñ, an den just, evid ar beherien,
evid or hinnig. Da Zoue, lakeet d'ar maro en e gorr,
med er Spered rentet d'ar vuez.

IX-I PER 4/13-16:Lennadenn euz lizer kenta an Abostol Sant Per (4/13-16)

13-Hervez ar perz a gemerit e poaniou ar Hrist, bezit leun a le-
venez,
evelse c'hwi a drido gand ar joa hag al levenez, pa skedo e hloar.

14-Ma vezit dismegañset ablamour d'ar Hrist, eüruz oh-c'hwi
peogwir ema o plava warnoh ar Spered a hloar, Spered Doue.

15-Ma vez gwasket hini pe hini ahanoh, arabad e-vefe
evid beza lazet, pe laeret, pe gret eun taol fall bennag,
pe evid beza diskuillet ar re all, dre fallagriez.

16-Med, mar deo evel kristen, arabad dezañ kaoud mæz ;
dezañ neuze renta gloar da Zoue, evid an ano-ze a gristen.

X-I YANN 5/1-6:

Dre ar feiz e teuom da veza bugale da Zoue.

Lennadenn euz lizer kenta an Abostol Sant Yann (5/1-6)

1-Kement hini a gred eo Jezuz ar Zalver, hennez a zo ganet euz da Zoue;

kement hini e-neus karantez evid an Tad,
a gar ivez an hini a zonganet anezañ.

2-Anad eo deom e karom bugale Doue, pa garom Doue,
ha pa virom e hourhemennou.

3-Rag an dra-ze eo kared Doue: mired e hourhemennou.
Hag e hourhemennou n'int ket eur zamm ponner,

4-Peogwir kement a zo ganet euz a Zoue a zo treh d'ar bed,
hag ar pezh e-neus grêt deom beza treh d'ar bed, or feiz eo.

5-Piou 'ta eo an hini 'zo treh d'ar bed,
ma n'eo ket an hini a gred eo Jezuz Mab da Zoue ?

6-Eñ eo, Jezuz Krist, (ar Zalver a oa da zond),
en hini 'zo deuet dre an dour hag ar gwad,
-n'eo ket en dour hebken, med en dour hag er gwad-
hag ar Spered eo a zo test, rag ar wirionez memez eo ar Spered.